

Ar c'hemener goapët.

(299, suite)

Var ton : Al laër quenan.

Selaouit hag e clefot, hag e clefot cana
 Ur zon nevez, gomporet, grêt d'o t'vertisa,
 Grêt d'eur c'hemener yaouanq,
 P'ini a oa re friand,
 Tromplet gant e vestrez,
 Pa oa c'hober al lez.

Houman, oa serwichez, ur plac'h fur ha galant,
 Qer bras ma en em fiche ma plije exselant.
 N'alle mont en nep afer,
 Serten, he dous gemener
 Kije qerqent hag hi
 D'oc'h he importuni.

(300)

Un deiz ma oa re ardis e lavaras dezi :
 Me a garje, va mestrez gallout ho posedi,
 Monet ganech da gousqet,
 Un habit d'ec'h ve prenet,
 Pèvar bistol oaspen,
 Va dous, en arc'hant quen.

Ar plac'h, heb enem facha en deus - an respontet :
 Friand e cavan 'r goaset, ennoc'h ne fizian get
 Ne vin da g'enta croq mat
 En habit hag er yalc'had,
 Neuze, va zerricher,
 Ni a rai an afer.

(349)

Ar c'hemener p' er glevas a zisqennas en qer,
 D'ar stal da glasq un habit eus ar c'haëra merzer ;
 En eur zerviet a facas,
 Ha d'e vestrez er rentas
 Hag ar pèvar bistol,
 Pa sonje sur e dol.

Ar plac'h deus-tu er guelas a zisqen prontamant
Da g'emeret an habit hag ive ar arc'hant.

Discuel a eube dezân,
Oc'h ober goab anezân,
Ar prënest eus e gambr,
Hag en rentas contant.

Etre dez hag uneg heur, deut amân da gousqet,
Ar orojou vo serrret, antren ne ellot qet;

(350)

Mes, me raio ar voyen
D'o c'hinsa gant ur gorden.
Va c'hamb' zo huel bras,
Er bevare estach.

P'erruas ar C'hemener vardro an anter nos,
Oa e vestrez er prënest pell oa ous e c'hortos;

Hag hi o laret dezân:
Va dous, ret eo divisqân
Ma c'hinsin ho tillad
Da g'enta d'ho scanvat.

Boutou, bragou ha lërou, justo-cor ha vesten
Lacas ar zot er baner, ma ouent hinset souden.

Pa zisqennas ar baner,
E pignas ar C'hemener;
Chaset oue gant poan bras
Tost d'an triede estach.

(351)

Guiridiq eo va daouarn, n'allân muin ho c'hinsân,
Ma na illit digrapa, m'oc'h arze er goasa.

Hag hi staga ar gorden
D'ar prënest dious ar varen.
Ar prënest a zerras,
Ma chomas eno en noas.

Setu pe seurt paecamant en d'oe ar c'hemener,
Erit e bevar bistol hag e habit mezer.

Er baner en e rochet,
Epad an nos brandouillet,
O vriata ar vog'er,
Tapet ar C'hemener.

Setu antèr-nos vintin e zous o tervuna,
 Hag o tig'eri n' prènest evit en distaga :
 Hag en pa oue disqernet
 A zo buan diredet,
 Ha ma savas en hu
 Partout varman er ru.

[antèr-nos = antrouz]

Ar chanson-màn, tud yaouanq, a zo d'oc'h instrui
 Lèzel trianqil ar merc'het en nos da rezozi.
 Couls e refot ho fortune
 Hep dalempredi nicun,
 Vel pa na rafac'h gen
 Nos-de nemet o ren
 Lod zo godiserezet,
 Diualit outho, goaset,
 En ur c'hoarzin ouzoc'h
 A rai goab ac'hanoc'h.

(352)

(Vol. I, p. 299-300 et 349-352).

 Canaoüenniq sod.

(352, suite)

Va douziq coant, pa o quelan,
 Cahet en bragou a ranqan;
 Gement a joa ameus ouzoc'h,
 Evel ameus deus ur bern qoc'h.

(Vol. I, p. 352.)